

Jafrennou –Taldir (Karnoed 1879 – Bergerac 1956)

Kanaouenn Laou Druilleg

N'am-eus na ti, na kerent,
N'am-eus mignon ebed !
Re all 'deus pezh a garent,
Me 'ya da glask va boued !
Va godell a zo goullou,
Daou wenneg 'm-eus hepken,
Mez an heol sklêr en oablo'
'Zo din war va hredenn.

Ne glaskan ket ar madou
Nag ar gloar nag ar vrud !
Me 'zoñj an oll enoriou
A vez aliez put !
Dihoant on ha dizoursi
Mez me 'm-eus koulskoude
Hentchou Europ hag Azi
Da bourmen va danve'

Daou wenneg 'zo em godell
'M-eus bet en aluzenn ?
Ne vanko ket din skoazell,
Me 'oar tapoud va den !
Daou wenneg ! Setu va stal !
Komañs't int d'am devi.
Ganto me 'ya da gestal
Eur bannah "eau-de-vie" !

Goude, mar gallan flemma
Eur wrahig koz bennag,
Me 'breno eun tamm bara
Rag va hov a zo gwag !
Goude, mar gallan krignad
Daou wenneg all adarre...
Me 'oar eun draig 'zo mad :
Eun tamm kig da greiste'.

Evidon war an douar
N'eus ket a nehamant.
'N'am-eus ket ezomm a hloar
A aour nag a arhant !
Mez eun deiz Laouig Truilleg
E-barz ar baradoz
'Kichenn an Oll-Halloudeg
'Vo lakaet da repoz !

Eun nozvez sul yen skornet
Da zeg eur, rik-ha-rik,
'N eru foz ema bet kavet
Laou Druilleg maro-mik.
'N e hodell eur horn-butun
Hag eur pezh daou wenneg....
Eno 'oa e oll fortun,
Ar paour-kêz Laou Druilleg.